



KANEN SANT EOUAN.

Tox : Sant Matélin.

Kanamp get joé hag ar eunn drô ,
Ni étré-z-omp lûd ag er vrô ,
Kanamp énoue ha gloér berped
De sant Eouan er Vretoned.

A Vreic'h-Izel ma bet savet ;
Tost de Dregér ma bet ganet ;
E Kermartinn , douar Minihy ,
Hag énouret e douar Babry.

Hé vué revô eur milouér
E ziscouei d'omp splann hon devér ;
El men dez groéit mar groamp eluê ,
D'er Baraoéz ni iei eunn dé.

Sant Eouan épäd hé amzér ,
El eunn heaul ue daul meit splandér ,
En dez splannet dré gréiz er bed
Dré hé vertu hag hé spéred.

A grouadur bihan studiet ,
Devout habil é taz meurbet ;
Deskein e hraz er sianseu ,
Er Skritur sakr , er lézenneu.

Hé santeleih e oé hémp pâr ,
El-t-hi ne oé ket ar enn douar ;
Krihoc'h karanté aveit Doué
N'hellé bout kavet meit enn Né.

Hé zevotion e oé tinér,
Hag hé galon lan a zoustér;
Mès dré bénijenneu kalet
Hé gorf peür e vezé malet.

Ar vara ha deür é viué;
Ar eunn nebet plouz é kouské;
Pé ar enn douar, finu hé bédén,
Kin meit eur mein indàn hé bénn.

De noz é vezé c'hoac'h kavet
Liés enn eur pore'h astennet;
Pé enn iliz, ar er pavé,
Get er fatec'h a pe semplé.

Servitour d'er Virc'hiez Vari,
Trézor ha skuir a vodesti,
Jaméz na min na tra erbed
Ne hraz poén de liz hé burted.

Hanval doc'h hon Salvér Jézuz,
Doc'h er guéih é oé truéuz;
Ha kement mäd en devezé,
En alézon ion hou ranné.

Penoz laret ol hé évreu;
Penoz nombrein hé virakleu;
Nag a düt klan hag afflijet
E zô bet get-hon sékouret.

Hiriu enn dé, penn du pédet,
Kentéh hé zorn zô astennet,
Eit rein sékour ér c'hlenhuedeu,
Hag eit gwellaat peb sort drougeu.

A penn du mät aveit gloér Doué,
Ha ma hér get er wirioné,
Ion e zilui enn afférieu,
E ra finu väd d'er procézeu.

Juj é Rouaon, juj é Tregér,
Just, direprech ar bep affér,
Ion e ranté de bep-unon
Revé enn droéd hag er reizon.

Enn dut peûr, enn intanvézed,
Er vugalé orfelined
E gavé, é peb occasion,
Sékour get-hou ha protéksion.

Aveit hou dihuénn doc'h er geu,
Ha rantein dehai hou droédeu,
Doc'h enn drô é vezé gwélet
E tislég doc'h avocadet.

E Rouaon, Tour ha mém Pariz,
E ma bet klevet é tiviz;
Hag é peb léh, el mé laré,
Enn tribunal e brenonsé.

A pe oé person é Trédréz,
Parrézic distér ar er méz,
Bihan ha bras en énouré,
Hag el eunn tâd mād er sellé.

E Lohanec, el é Trédréz,
Ion e hré mil vād ér barréz;
Labourat e hré noz ha dé
Aveit hou gounit oll de Zoué.

Anfin a p'arrihuaz enn ér
Devout galhuet de lein er gloér,
Merhuel e hraz..... Dré enn Éled
D'er Baraoéz oé bet douget.

O sant Eouan zô dirék Doué,
E gar kement hé vugalé,
Ch'tu-ni eman get confians,
Aveit goulénn hou assistans.

PÉDEN.

BISKAN : Eutrû sant Eouan benneget,
Hui hon patrom, hon cheleuret;
Receuet-ni get karanté,
Sellet-ni el hou pugalé.

Eman ar hon deulin stouiet,
Ni hou suppli, hon sékouret;
Beih aveit-omp eunn dibuénn sûr,
Doc'h er pec'hed hon gouarnet pûr.

Groéit-omp kerhat ar hou pazeu,
Héli fidél hou vertuieu;
Konduiet-ni héd hon bué
Dré enn hent e gondui d'enn Né.

Distroéit a ziar hon pénneu,
Diar hon tûd hag hon mâdeu,
Er malleurieu é véritamp,
E gôst de Zoué é offansamp.

Bermann kent kuittat hou Chapél,
Dirék hou rélégeu santél,
O patrom Breic'h! hon benneget,
Ni oll hag oll er Vretoned.

Bénn miz mé, miz er bokedeu,
D'enn dé ma hrér hou offiseu,
D'enn tôstan sùl d'enn nandec dé,
Ha pell, ha tôst, ni zei arré.